

GERIADUR VALLEE

adembannadur

a zo deuet

ER-MAEZ

# AN AMZER

Kazetenn sizhuniek

Gwener 16 Mae 1980

Niverenn 24 2bajenn

2vet bloavezh 2 lur

Mererazh, Skridaozerazh

2 straed ar Richardiera

35100 ROAZHON

CPPP 62319

## KOMZOU DIEUB

Mont d'ar c'hoarioù olimpek pe get? Sed aze ur pezh kudenn o deus tro hor gouarnamantou da dabotal e-leizh war he divout, ar gudenn nemeti, zoken a dalv ar boan bezañ diskoulmet ar buanañ ar gwellañ. Petra eo ar revoneizadur (inflation) en he c'hichen? Hag an dilabour, an divaeziadur (exode rural), ar saotradur, ar re nebeut a vrezhoneg e-barzh ar "media"? Pas meur dra, a-dra sur. Eveljust eo barrek a-walc'h hor sportourien evit lavarout o-unan ar pezh a sonjont a-zivout ar c'hoarioù. Koulskoude e kredin reif dezho ma soñj din-me diarbenn an afer: kement ha strivañ, poaniañ a lazkorf, deuit 'ta da naetaat ar rinieroù amañ, da ziharzañ, da adsevel ar c'hêriadennou hag ar c'hleuzeurioù; poan gollet ne vo ket!

JOBIG.

Ar pennad-mañ a zo ur respont d'ar pennad a oa bet embannet e-barzh niv. 9 AN AMZER, diarbenn ar c'hoarioù olimpek.

## en ur ger...

### E NAONED

Diskaret ez eus bet daou di bras kozh, kaer meurbet, hag a oa bet savet en XVIIIvet kantved, da vare ar baramantourien a veze o ziez war c'hlannoù ar stêr Liger. En o lec'h e tremeno linenn an tramwae...

## KELEIER BREIZH

• Abaoe pemp bloaz 'zo ez eus kaoz eus tennañ kailh eus hon douar. Mengleuz stibiom "Ti-Gardienn", tal-kichen Kemper, a vo digoret a-benn nebeut.

\*\*\*

• Da heul tamall maer Tehilhag (gw. A.A. niv.20), degas a ra an MRG da soñj en deus goulennet start endeo ma vo kemmet al lezennou evit ar pezh a sell ouzh an dud a nac'h mont d'an arme. Kinniget en deus ul lezenn nevez a-hend-all.

\*\*\*

• 2 Pont-an-Abad, goude m'o doa ar gouerien strewet avaloù

douar war hentoù ar c'hanton, en deus an Ao maer savet klemm ha goulennet 3.000 lur a zigoll digant an FDSEA.

\*\*\*

• An Ao Alain LACROIS, eus Naoned, en deus displeget er Sorbonne e dezenn "Ar marv bemdez e Breizh adalek 1480 betek 1670. Dek bloavezh en deus bet ezhomm evit kas e labour da benn. Betek-henn ne oa ket bet studiet ken spis plas an Ankoù hag ar c'hredennou rak-kristen e buhez ar Vretoned.

\*\*\*

• Tud 'zo o deus savet ar vrud

## stajoù & kampou an

# HANV P.2

## SELLIT OUZH

## N'EO KET DIFENNET TREMEN ARNODENNOU E

## BREZHONEG

### KEVRE KELTIK

#### UL LIZHER-KELAOUIN NEVEZ

KANNADIG KELTIA a zo anv ul lizher-kelaouin nevez, embannet gant skourr Breizh ar C'hevre Keltiek.

A-benn bremañ e vo kaset da izili ar C'hevre Keltiek en ur serr gant CARN.

Evit daou abeg eo bet krouet KANNADIG KELTIA:

- Ne gompren ket an holl dud saozneg, ha CARN e vez skrivet enni dreistholl er yezh-se.

- Kozhik e vez a-wechoù ar c'heleier a gaver e-barzh CARN, rak ar mouler a c'houlenn kalz amzer evit dont a-benn da voulañ anezhi. E-barzh KANNADIG KELTIA e vo kavet traoù nevez, darvoudoù tremenet goude d'an testennoù bezañ bet kaset da vouler CARN.

Divyezhek eo KANNADIG KELTIA brezhoneg war hantet ar paj-

ennoù ha galleg war ar peurest. Mat-tre an doare-se d'ober.

En niverenn 1 hon eus kavet, goude ur c'hinnig gant Jorj abHerve Gwegen (sekretour skourr Breizh ar C'hevre) hag ur pennad gant Alan Heusaff, pennadoù liesseurt a-zivout stajoù, skolioù-hañv, hag ur pennad diarbenn Gaston Lati-mier, marvet nevez 'zo.

Ar skodenn-vloaz d'ar C'hevre Keltiek a goust evit ar vretonek 28,50 lur ha 35 lur evit ur skodenn skoazell. Gant ar skodenn e c'hellit resev CARN ha KANNADIG KELTIA bep trimizvezh.- Jorj abHerve Gwegen, Kervean al Liorzhou, 29235 Gwinevez.

M.S.

### Fall ez a an traoù

### e porzh Moustier

Naoned.- Diougan fall war an dazedon e porzh Ar Moustier abaoe m'o deus lavaret pennoù bras Aljeria ne oant ket ken tomm bremañ ouzh raktres ur greanti ardivinkoù deleizhañ gaz da sevel en o bro (A.A. niv. 19). Neoazh, kaset e vefe ar gaz da Europa, met dre san. Un dra fall e vefe evit ar porzh nevez-flamm ma lak'fe Aljer he menozioù da vont.

### Un digresk

#### war «al lur glas»

Neventi vat d'al laboureriep douar: digresk a 1,5% war al lur glas, uhelaat a raio neuze ar prizioù eus kement-all.

E Dieppe, e-pad an noz, etre etre digwener ha disadorn 10, ez eus bet distrujet 700 tonennad tomat eus Maroko. Kenderc'hourien Vreizh o deus roet da c'houzout dre bellgomz ez int kiriek eus-se.

e rofe Bank Europa arc'hant da Vreizh evit ma vefe echuet da vat an hent-a-bevar Roazhon Naoned. Ger ebet gant kadoriad ar B.E.I., an Ao Ar Portz, ur breizhad anezhañ.

### SPORTOU

#### ABADENNOU MELLDROAD

-Trede rummad:  
AS Brest 1/1 Racing  
US Ar Menez 3/3 Chartrez  
ST Brest 1/0 Pariz SG  
Sant-Brieg 3/2 Malakoff  
US Konkerneve 0/0 US Normandi

-Pevare rummad:  
Kastell-Paol 3/0 Ar Geoteg  
PTT Naoned 3/3 Velos Gwened  
Kemperle 1/1 Kemper  
Ansiniz 3/2 Cholet  
UCK Gwened 2/1 Penmarc'h  
Sant-Nazer 2/0 Montroulez

#### ABADENNOU MELLZORN

-Merc'hed rann B:  
AS Brest 13/12 Dreux

# STAJOU 1980

Ar sizhun-mañ, ul lod bras eus ar gelaouenn a zo gouestlet d'ar c'hampoù ha d'ar stajou a vo aozet e-pad an hañv evit deskif pe beuzeskiñ hor yezh.

Kavout a reot dindan anv pep strollad meneget: da gentañ titouroù a-zivout ar strollad; da c'houde titouroù o tennañ d'ar c'hampoù ha d'ar stajou (deiziadoù, lec'hioù, pegement e koust...).

Spi hon eus e vo kavet talvoudus hol labour, ha ma 'z eus kampoù 'zo n'int ket meneget, hon digarezit.

## 1. ABEG

(AR BREZHONEG ER GER)

**Chomlec'h:** Garmenig Ihuellou Le Menn, 15 straed ar Fourgadennou, 22000 Sant-Brieg. PG (96)33.66.13.

• Aozet e vo e-pad an hañv ur c'hamp gant tiegezhioù o komz brezhoneg; pep hini eus an tiegezhioù a bae al lojeiz hag ar boued. Deiziad ebet divizet betekhen.

## 2. AR FALZ

**Chomlec'h:** straed Kna ar Gwez, 29210 Plourin-Montrozeul. KRP: Roazhon 430.20H.

**Menoziou, Spered:** "Breizh, Sokialouriezh, Likted" (Ar Falz, niv. 31 rumad nevez). Ezel eus an TSAB.

Embann a ra ur gelaouenn divyezhek (pennadoù dreistholl e galleg) a zeu er-maez bep trimizvezh (40 lur ar 4 niv).

• Staj brezhoneg.- Rostren, etre an 2 hag an 12 a viz Gouere. Titouroù digant ar sekretourva. Gwelout ivez KVBB.

## 3. AR SKOL VREZONEG

**Chomlec'h:** evit ar stajou, betek ar 5 a viz Gouere: A. Le Mercier, 6 ru Beaumarchais, 29200 Brest; ha da c'houde: A. Keravel, 6 ru Neptune, 29200 Brest.

**Pellgomz:** A. Le Mercier: 16 (98)44.89.42. A. Keravel: 16(98)44.22.04.

• Stajou aozet gant Kelh ar Gellanerien vrezoneg hag Al Leun Nevez.

Tu a vo d'ar holl re da zont bugale a-benn 8 vloaz, krennardea (an daou rumm-se gant eotre o zud), tud en oad.

Mizoù: 30 lur, al levrioù ouzhpenn (ne vo ket ret prenañ anezho).

**Deiziadoù:**

-Eus al Lun 30 a viz Even da 9eur betek ar Sadorn 5 a viz Gouere da 17eur, e Brest.

-Eus al Lun lañ a viz Gwengolo da 9eur betek ar Sadorn 6 da 17eur, e Brest hag en Orient.

An devezh: 9eur-12eur ha 14eur-17eur. Tu a vo d'ober

## 4. BLEUN-BRUG

**Chomlec'h:** 5 straed Francis James, 29200 Brest.

• Staj brezhoneg.- Adalek ar lañ betek ar 7 a viz Gwengolo 1980. Evit tud en oadgour hag ar familhoù. Lec'h: Enezenn Raden, Centre Lycéen Rural, 29224 Hanveg. Pellgomz: (98) 20.03.90. Staj degemeret gant ARPEC. Priz: 770 lur (lojeiz ha boued; ar priz-mañ evit ar re a gemer perzh evit "Formation Permanente/ Ar re all: war-dro 50 lur).

• Staj evit adsevel tiez.- Aned miz Gouere. Titouroù d'ar sekretourva.

## 5. KEAV

**Chomlec'h:** 44 straed Jean Rameau, 29000 Kemper.

• Staj e Skaer (56), skolaj Sant Alan, e-pad eil pemzektez miz Gouere.

## 6. KENDALC'H

**Chomlec'h:** Ti-Kendalc'h, Sant Visant war Oud, 56350 ALAER. PG: (99)71.18.10.

• N'eus ket e gwirionez stajou evit deskif nemet brezhoneg, met ar brezhoneg a vez merket war roll an danvezioù studiet e-pad ar stajou. Titouroù digant Ti-Kendalc'h.

## 7. KB

(KRISTEHIEN BREIZH)

**Chomlec'h:** 1 skvar Oslo, 35100 Roazhon.

**Menoziou, Spered:** Katolik.

• Devezhioù studi etre ar 7 hag an 12 a viz Gouere e Bro-Wened).

## 8. KVBB

Kreizenn Vakansoù Bugale Brezhonek a vez aozet gant Ar Falz.

**Chomlec'h:** KVBB, 12 plasenn ar C'hosmos, 29000 Kemper.

PG: (98)90.05.81.

• Kamp etre ar lañ hag ar 24 a viz Eost, e C.E.G. Spezet (29) evit bugale etre 6 ha 14 vloaz, a fell dezho deskif brezhoneg dre ar c'han hag ar c'hoari. Ar "Bons de vacances" a c'hell servijout evit ar c'hamp-se. Priz: 1.040 lur.

## 9. EAT

(EMGLEV AN TIEGEZHIOU)

**Chomlec'h:** 30 leurgêr al Lisoù 35000 Roazhon.

**Menoziou, Spered:** Katolik.

• Skol hañv e Kistinid etre ar 7 hag an 12 a viz Gouere.

## 10. EMGLEO BREIZ

(Gwelout stajou Ar Skol Vrezoneg).

## 11. SKOL AN EMSAV

**Chomlec'h:** Sekretourva kreiz: 8 straed Hoche, 35000 Roazhon. PG (99)30.90.15.

**Animatour:** 5 straed Sant-Vazhe, 29000 Kemper.

**Menoziou, Spered:** Adsevel ar brezhoneg o stourm war an dachenn sokial ha politikel. Embann a ra ur gelaouenn daou-viziek: Bremañ. Ezel eus an TSAB.

• Staj evit sevel ur film (deiziad ebet). A.C.A.V. Sant Kadou, 29237 SIZUN. PG (98)58.82.39.

• Staj e Bro Gembre (deiziad ebet).

• Stajou brezhoneg: -Etre an 20 hag ar 26 a viz Gouere (pep live) e Bro Gerne.

-Etre ar lañ hag ar 6 a viz Eost (pep live) e Bro Dreger.

• Skolveur Hañv S.A.E.: etre ar 14 hag an 19 a viz Eost e Bro Dreger. 8 eurvezh a studi bendeiz.

• Staj adsevel ar c'hleuzioù e Mellak (e-kichen Kemperle).

• Ur bern traoù all a vez aoz-gant S.A.E. Titouroù d'ar sekretourva kreiz pe o skrivañ d'an animatour.

## 12. UHB

(SKOLVEUR BREIZH-UHEL)

**Crash-Course** e derou miz Gouere. Leun eo dija ar roll

## 13. SKOL VREIZH

**Chomlec'h:** 1 plasenn ar Marc'hallac'h, 29210 MONT-ROULEZ.

• Staj divyezhek (galleg/brezhoneg) etre ar 6 hag an 2 a viz Gouere e CES Rostren. Ur bern traoù a vo kinniget d'ar berzhidi, e galleg koulz hag e brezhoneg.

**Prizioù.- Enskrivañ:** 30 lur (gopriddi) evit tout an tiegezh Priz ar staj: (pep devezh) 55 lur evit tud en oadgour, 45 lur evit tud yaouank ne labouront ket, ha 35 lur evit ar vugale.

Degasit ho seier-kousk.

## 14. UDB

(Resevet netra).

### EVIT AR STAJOU

TITOUROU a vez posubl kavout e C.I.J.B. (Centre d'Informations Jeunesse Bretagne), 6 cours des Alliés, 35100 Roazhon. PG(99)79.28.55.

### AN AMZER

2 straed ar Richardiere  
35100 ROAZHON

Kelaouenn sizhuniek  
embannet gant DAZONT

Rener ar gelaouenn:  
Mark DECAMBOURG

### KOUMANANTOU:

6 MIZ (24 niverenn):	
Reizh:	36 lur
Studierien, skolidi:	24 lur
Skoazell:	40 lur
9 MIZ (36 niverenn):	
Reizh:	48 lur
Studierien, skolidi:	36 lur
Skoazell:	60 lur
12 MIZ (48 niverenn):	
Reizh:	72 lur
Studierien, skolidi:	48 lur
Skoazell:	80 lur

KRP( ): Roazhon  
CPPP 62319

Niver a skouerennou moulet  
evit an niverenn-mañ: 1.000

Mankout o ra deomp kenskrivieren.  
Titouroù d'ar gelaouenn. Trugarez!